

Son ar Mamou kaër



Ton Nevez.

I

Eur miz a zo oun dimézet
Ha mé zo dija inouet
Selaouit mad ar vrionez
Hag e klevorc'h tout va buez.

II

Va greg a zo eur plahig koant
Ganti me ne meuz tamp poant
Heurus vichen c'hellit kredi
Ma ne miche bet nimiti.

III

E mam a zo ganti er ger
Ha e c'houzorc'h ar mamou kaër
N'in mat nemet da lakat trous
Kar o zéodou zo tout traou louz.

IV

Pa zivunant diouz ar mintin
Teut diorc'h-tu da lavaret d'in
Sao buan ta ha gra kafé
Da zigas d'in e va goélé.

V

Araok va greg vez servichet
Annez me a viché drebet
Plijout ra d'in pé ne ra ket
Me rank mont kuit eb tam ebet.

VI

Pa dean dar géar evit drebi
Neuze e klevant anezi
Atao e ioual pe o voéla
N'hoar ket memez evit petra.

VII

Pa vez ar souben servichet
An ini goz a vez goelet
Gant e daouarn e patouillat
Hag e klask tout an tamou mad.

VIII

Neuze pa vezont tout klasket
Ar plat dimmé a vez passet
Me zo er gear evel ar c'hi
Hag an ascourn me rank drebi.

IX

Heuruzamant eo dija koz
Mal meuz z'afé d'ar baradoz
Bebez choa c'hellit kredi
Ma miche kollet anezi.

X

A vouez va fenn me gano
Da va mam baour ha kenavo
Bremen me zo eun heurustet
Péguir meuz va mam kaër kollet.

XI

Selaouit mad potred yaouank
Néo ket tout koant er plahig koant
Dirak ar méar livirit nan
Kentorch vit beva gant e mam.

DISKAN

Tré ma po mamou kaer, na po nemet tourmant
Lesquit anéo er ger, hag e vezorc'h kontant
Komerit er vaouez, a lezit eb truez
Ar vam ganth e zeod louz er géar da ober trouz.

(Reproduction interdite).

EUR KASTELLAD.